



153

Friko Jakou, ar Paotr fur

I

Jakou hirio zo dimezet
Gant er plac'hig fur a koant
E.....? eo fortuniet
C'hoarzin, c'hoarzin a rankan.

II

En dervez ma oa ar goulennou
Mari a d'oa plijadur
Kaout a reaz dezi Jakou
E ini koz a ioa fur.

III

Biken vez en ostaleri
Ne gav ket mad e vanne
Ne vez ket gwelet e fumi
Sethu er paotr a zoare.

IV

An hini a velfe Jakou
D'ar zul vont d'an oferen
A da c'houde er gousperou
O kana a vouez e penn.

V

Met hirio 'vit friko Jakou
An holl zo bet souezet
Great en deuz en e vragou
Ar paotr fur oa dirollet.

VI

Oh! a lavare Mari
Pe seurt den em euz paket
Kaout a reaz din dimezi
Gant ar furra diouz ar botred.



VII

A pa oa poent mont da gousket
Mari a ioa truezus
Rak pa oa Jakou divisket
An daolen a ioa farsus.

VIII

A Jakou er gwele kloz
A gantan serret an or
A war ar bank e ini goz
Zo c'houlen, c'houlen digor.

IX

Diouz ar mintin o tihuna
Jakou a jomas mantret
O kevet Mari, o oela
A gant truez o lavaret.

X

Hag er meaz diouz e vele
M'o piche gwelet Jakou
O pec'hi war zent a Doue
Pa zellaz diouz e vragou.

XI

Breman evit echui
Selaouit merc'hedigou
Araok deoc'h dimezi
Diwallit diouz er Jakou.

Diskan

Jakou zo en den dirollet
Holl gantan zo bet tromplet.

PABOR KASTELL.

M'o p'euz c'hoant evit eur friko kaout plijadur a muzik
Grit g'lv d'ar mab hag ive da lfik.